



# KENAVO KOS HOSTELERI

Kenavo kos hosteleri, keno did a laran ;  
Pa neuz met rebechou garo deuz da c'heul er bed man.  
Rag en kement drouk a c'hoarvez et z'hout et penn kenta,  
A demeuz an holl vicheriou te eo c'hoaz ar falla.

Daoust ma vaer ganet fourgasset, var evez deiz a noz,  
Renker paea frejou diod, a neuz ket da c'hortoz ;  
A goude deac'hel war an tron ar varc' hadourien vraz,  
Oc'h unan doc'h skurpuluz oc'h da viken paour raz.

Renkout beva 'vel eur gluven, gout tremen deuz an holl,  
Rei boden da gos pratikou kaout outhe koll war goll.  
Boutet en kement kotigel, insultet aliez,  
A rei peoc'h c'hoaz setu eno gwir stad an hotizez.

C'hoaz an hini deu da zestum gant poan eun tamm danve  
A ve gret brao laer deuz outhi, hag ouспен marteze.  
Trei a distrei vel va karo, bike vo didammal ;  
Setu perak meuz kemeret, gwelit eur vicher all

Euzi 'ran pa c'han da zonjal em bue tremenet !  
A pa welan na glesker ken evel tud penn-follet,  
Nemet beva deuz evachou, dizurz a froderez ;  
Profita deuz gijou diod, suna gwad ar paour kaez !

Itris wit deuz boëson noazuz, agass ar bed da fall,  
Avaer barek braz da veva oar den peb stum all !  
Tre ma vo Pipi pasteher a me krampouezerez,  
Ni gont beva pell evuruz hon daou c'hoaz assamblez !

CHARLEZ ROLLAND

(kanet gant Fantic)

en peiz c'hoari « Ar Vezventi »

## ZAN AN DRAGON YAOUANK

Didostait holl da jilaou ha c'hwi 'glêvo kana  
Eur zon gwirion 'zo kompozet a neve wit ar bloa ;  
A zo gret d'eur plac' hik yaouank demeuz a ligne vad,  
Pennerez, gant se penvidik deuz a beurz mamm ha tao.

Eun dragon yaouank deuz a gear deue d'e gwelet,  
Hag a lavar dei, va maestrez, me 'renk o kavet,  
Hag a deue d'e gwelet hag en noz hag en de,  
Ha karout a rae anezi gant gwir fidelite.

Na taol evez eonik bihan rag e vez-te tapet !  
E m'an ar sparfel uz da benn na te ne zonjaez ked ;  
Hag ar plac'hik warhemalheur he zroad a zo ramplet ;  
Ar goaz pa zantaez 'oa paket a neuz dei lavaret :

- « Kenavo, ma mui an-karet, gant glac'har hag anken,
  - « Me renk c'hoaz monet d'an arme benn beza kabiten ;
  - « Warc'hoaz vintin e partian hag e c'han maez ar vro
  - « Ha ma tistrôan-me biken, zur me o c'heureujo.
- « O den kriz ha den dinatur, ô godisser treitour !  
« Len e ran barz en da galon 'vel en eur milizour ;  
« Met kerz ha deu lec'h ma kiri, kerz pell er maez ar vro,  
« Benn eun deiz hag eur bloaz aman ni hon daou n'em gavo.

Pa oa echuet an nao miz, er gear en ti he zad,  
Hag hi o fonet da Bariz ewit ober dillad,  
Da laket ober eun habit en giz d'eur gwir dragon,  
Hag hi o redek d'an arme war lec'h he gwir vignon.

- Kement a deuz gret o vale ma ne neuz-han kavet,  
He zabren noaz ganti n'he dorn e deuz-hen zaludet ;  
« Salud dide ma mignon ha did ma c'hamalad ;  
« Rak breman me renko gwelet a te'zo c'hoaz paotr-mad ? »

En spaz deuz a ziveur-hanter'deuz e n'em gombatet,  
Met ar plac'h gwisket en dragon a deveuz gonezet  
Hi eo bed an ajilanta da dreuji he galon ;  
« Setu er mei da rekonpanz demeuz da drahison ! »

Kanet gant TIN AR MAD euz a Dreduder.  
(Mam ar barz CHARLEZ ROLLAND)